


TRUKANNAD AR JUICHEL



1 bloavez.--N°2

4 a C'huevrer 1812



SACRAMANT AR BRIADELEZ

Evit na vo easoc'h deoc'h delc'her sijn mad euz ar pes o peus olevet, er miz tremenet, divarben sacramant ar Briadelcz, e lakan deoc'h anan eul loden euz ar pes zo bet lavaret var genentse.

Digant piou e teu^s Digant Deu.

An A. Doue e unan, er pen kenta euz ar bed, eo en euz instituet ar stad a briadelez. Hag evel na eo bet instituet gant Deu neuze, ar briadelez a zo eul lian a lacc'a daou zen da veza unanet en eun doare na na reont o daou neset unan ebken.

Euz ar Briadelez, eguiz na ea bet instituet gant Deu er pen kenta euz ar bed, Her Zalver Jesus en

euz greet eur sacramant, a re d'ar re a zinez ar
o'hraz da veva ovel guir gristenien assamblez ha da
zevel ho bugale e doujans Doue.

Ar C'honsil a Drant en euz disoleriet a eneb ar
Protestantet "es eo ar Briadelez unan euz ar zeiz
sacramant en euz greet Jesus-Christ hag a ro gras"
d'an dud a zines da veva santel ha da zevel ho buga-
le e doujans Doue.

Etouez ar gristenien ne o'ell ket beza priadelez
eb na ve er memes amzer sacramant, hag abalamour da
ze an dimezi hag ar sacramant na o'hellont ket beza
dispartiet.

Hag an eured civil, petra eo ? N'eo ket kals a
dra. Eun tasio affer eguis dija ar re e man ar mod
da ober dirag an notaire. An eured civil ze a ve
greet dirag ar near en ti-kear, na servich da netra
nemet da renka ar pes a zell ouz ar madou hag an
heritaohou

Evelse ar pes a hanver eured civil n'eo ket
eun dimezi eo, hag ar gristenien n'int bet nemet en
ti-kear n'int ket dimezet ha na o'hellont ket mont
da veva assamblez eb mont da veva er peo'het.

En hor bro, an eured civil n'eo ket coz bras rac
arao ar bloavez 1790 na vie ket hano ebet dioutan.
Eun testeni sur a gement-man eo, na gaver e ti-kear
ebet cahierou da verka eureujou greet arao ar zara-
ze nemet cahierou an Iliz.

Brezan da viana e clasker rei eun dalvoudegez vraz
dezhan hag eur beleg na o'hell ket, eb riska beza
condaonet, dimezi daou gristen na na ve ket gantho
eun tam paper da ziskouez int bet en ti-kear.

*Lezennoù an Iliz divarben Sacramant ar Briade-
lez.*

Pe guir priadelez ar gristenien a zo eur sacra-
mant ha na o'ell beza nemet an draze, hemañ oll din-
dan galleud an Iliz.

"Jesus-Christ, n'eo euz roet nemet d'he Iliz ar
o'halloud da ober lezennoù divarben dimezioù ar
gristenien."

Kenta lezen.— Daou zen na o'hellont ket reseo sa-
cramant ar Briadelez na na daouont ket da rei ho ger
o'ell d'eguil dirag eur person hag a zo, en he bar-
ez ha dirag daou dest da nebeuta. Person ar barrez
oulsgoude a o'hell carga eur beleg all da zalc'her
e blaw.

